

AR POTR FIN

War don : *Ar sez skiant naturel.*

Dre-holl ha da beb amzer, evid bean pôtr fin,
 E renker da nebeutan kâd eur begad ijin ;
 Teo 've ho muzello, true rei d'ac'h bara,
 Ma ve en ho penn ober eur pôtr fin gand netra.

Chouesk evel eur fistoulik, ramp 'vel eur zilien,
 Treitour evel eur c'haz gleb, flour 'vel eur glouaren,
 Ar pôtr fin dizeblant, don en ho kefridi,
 En esped d'ec'h evezianz, fouro dalc'h-mad e fri.

Gand armolud an ifern blerimed aliez,
 E laten da drouc'ha dous n'e deuz ket he farez ;
 Didrouz, e tispenno an dud gwellan brudet :
 Goud 'ra flemman 'vel eun aer en-mesk ar ied kuzet.

M'en euz laked en e benn taillan eur fineze,
 D'an diaoul, a-rok mankout, e werzo e ine :
 En treo ker ha gwirion e spered 'zo berrik ;
 Mez en holl fineseo ec'h e leun a itrik.

Goud a ra eo brudet fall skritur an dud disket ;
 « Me 'zo ive, 'me 'r pôtr fin, da skrivan fall-kollet. »
 Euz e holl skiencho ze eo an desteni :
 N'en euz ket e bar da c'houd ar stum d'en em veuli.

Evid foura en ho penn eo e spered digor,
E laro n'en euz biskoaz bed ar priz a vémor :
Kredet ive, m'ho ped, e oar mad ar gallek,
War digare nan eo ket krenv war ar brezonek.

War an ton braz en e di c'houi 'vo digemeret ;
Rak ma ve gwin war e dol, dirak-oc'h 'vo chanchet :
Chanch bugel er c'havel 'zo eun tol a ijin ;
War-n-ean e c'houit an holl nemed ar botred fin.

Ar pôtr fin evid bean parfed en e vicher
Oar bean flour ha garo diouz ma ve an amzer :
D'e gomzio ampezet ma ret skouarn vouar,
Ho kourdrouzo, a dra-zur, ken a greno 'n douar.

'Vid ober d'ec'h bale eon kraz d'ec'h e lavaro :
« Sented ouz-in, penn kalet, pe me ho luduo. »
Neuze c'houi 'vo nec'het, en ho penn ho po droug,
Ma kredet re varc'had mad, 'man e droad war ho koug.

« Me 'zo, eme ar potr fin, deud mad d'ar penno braz ;
« Dre-ze, ma na ziwallied, me rai gan-ec'h eur goaz. »
D'ho chefo, m'hen kredet, eo ive kolladen :
Renk 'vid ober ho parv d'ec'h nemed eur c'hoezaden.

Pa vo an avel a du e roi d'ec'h alio
Gand seblant a interest evid hoc'h aferio
Heuliet gand holl fians eun ali 'vo roet,
Hak ho troad 'vo, heb-dale, e-barz en pech stignet.

Chetu aze eun nebeud euz troio ar pôtr fin.
E galon, eine ar vrud, 'zo ed holl da ijin ;
Pa ne oar karet den, gand den nan eo karet :
Gallout 'ra heb ar bluen konta e vignoned.